

A. MERSER

2000

KLIMAT



BRUD - 50

Hañv 1975

BRUD  
AR YEZ HAG AR VRO  
(4 niverenn ar bloaz)

Koumanant bloaz: 30 lur.

Rener-Teñzorier: P.M. MEVEL,  
14 hent-dall BREIZ IZEL  
(14 Impasse Breiz Izel)  
29200 BREST  
K.R.P.: 1499-55 Roazon  
(pe chekennou bank).

Sekretour: A. MERSER,  
6, ru Beaumarchais,  
29200 BREST.

(Kas ar dornskridoù d'ar sekretour.)

Liestennet ez-prevez gand BRUD; ti-moulierez BRUD.  
Diskleriet hervez lezenn; trede trimiziad 1975.  
Peb gwir miret striz.  
Ar Merour: P. M. MEVEL.  
CPPAP niv.:aotre ar 27/4/64

BRUD

ar Yez  
hag  
ar Vro

Niv. 50  
HARV 1975

## RIMADELLOU

Ar rimadellou, kontadennoù rimet, mojennoù berr, divinadennoù hag all dastumet ha kennesket el leor-mañ, a hellfe beza renket hag urziet e teir lodenn d'an nebeuta:

1) Ar rimadellou (rimdelloù, rimollenoù e Kerne) a veze kanet gand ar mammoù ha kement hini a ree war-dro ar vugale vihan, dreist-oll evid o lakaad da lammad war o barlenn. Da skwer:

*Ehu, marhig  
Ehu d'ar Pont...*

E saozneg "Nursery-rhymes."

2) Gand lod all e ree ar vugale eun tammig brasoc'h en o c'hoariou, evid dibab ar re a jome "e-barz" hag ar re a ye er-mêz". Galleg: "comp-tines", Saozneg; "counting-out-rhymes."

3) Eun toullad e-touez ar rimadelloù a zo heñvel a-walh ouz ar po-zioù berr anavezet mad e Breiz-Veur hag anvet "limerick", "non-sense-verse", rimadelloù heb penn na lost (cf. 67,68, h.a.; hag ar "gevier" (195-204).

Eur bern re all a zo c'hoaz, mojennoù, kanaouennoù bihan leun a fent, rannoù, mad da zidua kerkoulz ar vugale hag ar re vraz.

Rimadelloù evel-se, gand stummoù disheñvel pe eil-stummoù aliez, a veze kavet e pep korn euz Breiz. Kalz anezo a zo bet dastumet gand F.M. an UHËL (Soniou Breiz Izel) ha goude gand klaskerien all. Kalz ivez a zo chomet diembann ha lod a zo aet da goll, ar pezh a zo eur holl braz. Ha bremañ traou galleg o-deus kemeret o leh.

N'eo ket hepken e Breiz e vleunia seurt rimadelloù. A-vil-vern ez int strewet dre Europa a-bez ha dre ar bed oll (1). Penaoz ha peleh int bet savet? An dud gouizieg war ar folklore o-deus, evel ma lavar-er, stouet o fenn war ar gudenn, heb dond a-benn d'en em grieved war an diskoulm. Germaned an Hen-amzer, emezo, a ree ganto evid dibab e-touez ar brizonodi ar re a oa da veza lahet. En Danmark hag er broioù keitieg, eme lod all, e selvichent d'ar vesaerien ha d'ar besketerien evid konta an deñved hag ar pasked. Ar pezh a zo sur eo o-dea ar rima-delloù eun dalvoudegezh strobineleuz ha relijiel. Eveljust, gouzieien an amzer-mañ, levezonet gand FREUD pe MARX, a glask enno eur ster kur-zet o tenna d'an Endonspered pe da Stourm ar Renkadou.

Daoust pe zaoust, ar rimadelloù o-deus redet bro, dreist an harzou; kemeret o-deus stummoù nevez e peb rannvro, heb ma ouezfed peurvuia peleh int ganet ha penaoz int bet deuet betek enno. A-wechou kouls-koude e heller teuler war unan bennag anezo eun tammig sklerijenn, evel ma'z eus bet graet war an hini vrudet:

*Am, stram, gram,  
Pikê, pikê, ratatam, h.a.*

Prouet eo bet e oa aze eur rimadell hermaneg koz, distreset ar gerioù enni:

*Eun, daou, tri,  
Ni, ni, c'hoel dero,  
Red, red, marheger,  
Eun, daou, tri.*

D'am zoñj, arabad eo klask kosaad ar rimadelloù, evel ma reas Kervar-ker evid ar Gwerzioù, hag evel m'eo techet c'hoaz en devez hirio tud zo d'henn ober. Unan bennag marteze a zo deuet betek enno euz an XVIIved kantved. Peurvuia int yaouankoc'h, savet en XIXved ha zoken en XXved kant-

(1) Lenn, da skwer: "The Oxford Nursery Rhymes Book (1955).

ved, levezonet a-wechou gand ar galleg ha renket gand barzed anavezet (Da skwer: 92 "Frère Jacques"; 185 "Madame la Marquise"; e leh all:A-louette, je te plumerai"). N'eus ket keid all c'hoaz e oa beo krouidigez ar rimadellou. Pa oan er skoi, war-dro 1925, ni bugale on-oa savet eur "rimolenn" diseven d'eur vestrez-skol drougkaret:

Mari fri-kamm  
Pa gar a vramm,  
Pa gar ne ra ket,  
Pa gar ya d'ar red.

D'eun den yaouank, paket brud fall gantañ er barrez, e kanem:

Tin ar Jañ zo 'l loan brein  
Eun tamm du war e goste,  
Tin ar Jañ zo 'l loan brein  
Eun tamm du war e gein.

E Rosko, hervez am-eus klevet, tud koz paour an Ospital, maget treudig a-walh, a gleve ar hich bihan o hervel anezo d'ar prejou o lared:

Kaol brein da lein,  
Kaol brein da lein, h.a.

E peb leh e veze savet evel-se rimadellou nevez, mad da rei eun tammig blaz er vuhez.

Evelato, ar rimadellou ne die ket beza sellet outo evel disterachou hepken, mad da lakaad ar vugaligou da c'hoarzin ha da roi peoh. Talvouduz e oant. Rag ar mammou, war ar mêtz, a ouie dre ijin natur, heb gortoz labouriou ar re a ra war-dro psikologiez ar babigou, petra oa mad evid derhel o bugale laouen, digeri dezo o spered, distagella o zeod, o lakaad da zizoloi o horf hag ar bed endro dezo. Ha setu da betra e oa mad ar rimadellou. Bez' e oa enno eur gelennadurez, an hini genta, an hini bouezusa marteze. Ar hrouadur bihan, ma n'e-neveze ket an eurvad da glevet anezo war varlenn e vamm, a jome warlerhiet, evel moredet e skiant.

Diwezatoh, rimadellou all a lakae ar vugale eun tammig brasoh da zeski meur a dra diwar-benn an dud, al loened, ar plant. Gweled a raent, dirag o daoulagad bamet, eur gomedienn c'hoariet gand ar yar, ar haz hag ar hi, al lododenn, an alhweder:

Ha 'ma ar yar o neza sei,  
Hag ar hog o kana dei,  
Hag ar hi war lein an ti,  
'H aza boued d'an houidi.

Daoust ha n'eo ket heñvel a-walh an daolenn-ze ouz "tresadennoù beo" Walt DISNEY ?

E peb bro, skrivanierien ha barzed o-deus kavet er rimadellou eun eie-nenn fresk evid renevezi ar varzoniez. E Breiz-Veur, LEWIS CAROLL e-neus graet ganto en e leor brudet "Alice in Wonderland". E Bro-Hall, ar sur-realisted, ROBERT DESNOS ("Le Pélican de Jonathan") o-deus klasket dre enno mond er-mêz euz ar vuhez voutin.

Evidom-ni, evid ar re o-deus bet an eurvad d'o hlevet war vuzellou o zud, e chom er rimadellou eun dra bennag euz o bugaleaj tremenet, unanet

ma'z int gand karantez or mammou ha douster an ti. Klevet a ran c'hoaz va mamm o tibuna din, dirag an tan keuneud o flamina laouen war an oaled, eur rimadell ha n'ema ket el leor-mañ:

Bouedou, bouedou,  
'Ma ar haz o nea stoup  
D'ober 'l loerou d'ar hi,  
Da vond da friko Chañ-Mari,  
Chañ-Mari zo 'n paotr mad,  
'Ma e friko er Gergoad.

Ha gand va zad-koz e tesken petra a lavare mouez raouliet ar pichon:

M'ho krougo, paotr koz...  
(pemp pe c'hweh gwech)  
Kroug!

Kredi a reom ne vo ket an dastumadenn-mañ talvouduz hepken evid ar skolidi o teski brezoneg. An oll a gavo enni eun dra bennag da bennaoul, rag eul lodenn eo euz an herez sevenadurel lezet gand ar bobl, eun teñzor eo, teñzor burzuduz ar rimadellou.

P.M. MEVEL.

Tresadennoù: n'on ket deut a-benn da gavout eun den en-dije savet tresadennoù... evid netra! Tu a vo da lakaad ar vugale da sevel tresadennoù diouto o-unan. Ha marteze e vo kavet eun tresadennet akuit, ha diwar netra, evid eun eil moulladur.

Minikasedenn: Eur vinikasedenn a vo savet; kavet e vo enni an oll rimadellou a gaver el leor-mañ. He goulenn digand "SKOL VREZONEG AR MERHER", e ti A. MERSER, 6 ru Beaumarchais, 29200 BREST.

Notenn: Graet eo bet eveljust gand doare-skriva ar Skol-Veur, bet aprouet gand Minister an Deskadurez Vroadel e 1955. Heuliet on-eus skwer al leoriou bet embannet gand Skol-Veur Brest (Méthode audio-visuelle de Breton) hag ar gelaouenn STUDI, evid per a zell ouz an ar- gwan-verb on-eus skrivet "-ed" hag evid ar ger "ked", evid ma vo aesoh da zistaga.

Ma anavezit pe rimadellou all, pe stummoù all, kasit aneze din: A. MERSER, 6 ru Beaumarchais, 29200 Brest.

- 1- Bizig bihannig, bizig an tan, bizig ar bizaou,  
Bizig lip ar hrog, bizig chaker al laou !
- 2- Biz bihan, biz al logodenn, biz ar bizaou,  
Krogig ar youd ha maillig al laou.
- 3- Bizig bihan, bizig braz,  
Ma larez gevier, eh i d'an tan braz.
- 4- Bizig bihan, bizig spern,  
Ma larez gevier, eh i d'an ivern.
- 5- Bizig bihan, bizig moan,  
An hini lavar gevier ya d'an tan !  
Bizig bihan, bizig spern,  
An hini lavar gevier ya d'an ivern.

(Pa vez graed eul le etre daou vugel, e reont "bizig krog" en eul lavaroud unan euz ar rimadellou-ze da startaad ar bromesa etreze.)

- 6- Al laer e-barz ar haol,  
Piou eo ?  
- Yann Boudig eo.  
- Peleh ema ?  
- Kuzed eo. (C'hoari evid dispartia).

## MAB-DEN

- 7- Jañ-Pier Bistrakig,  
Paotrig e vamm-goz,  
'N eur domma lost e roched,  
'N-oa poazed bouton e gov.
- 8- Me zo den, ha mab da zen  
A sko an douar ken na gren.
- 9- Greunennig aval,                   En peseurt bro e varvin,  
Greunennig aval,                   Pe en breton pe en gall,  
Lavar din                               Pe en greunennig aval ?

(Bed daslumed e Ploueg-ar-mor gand an Ao. Kalvez. En breton: Breiz-Izel; en gall: en vro hallo.)

10- Toutouig bihannig,  
Kostez ar hleuz eo tommig.  
Pa vez an avel oh ober  
Houl houl!  
E vezer braoig en toutou !  
(*toutou, toutoun:kavell; toutouig:kousk.*)

11- Bio! bio! bioled!  
Stag eo an tan en oaled,  
Hag en oaled hag en ti,  
Hag e-kreiz al leurzi.  
Katerinig o ouela:  
Me ne chomin ked amañ,  
Da hounid boued d'ar re-mañ.  
Me a yelo ahann d'an Normandi !

12- Me ya ahann d'an Normandi,  
Hag a zavo eno eun ti,  
Hag a boanio ma gwalh,  
Hag am-mo arhant leun ma yalh.

13- Ar hog a lavar:  
-"Deud eo ar mestr d'ar gêr".  
Hag ar haz:  
-"Meo, meo!"  
Neuze ar hi:  
-"Atao, atao !"  
Hag ar pemoh:  
-"Peoh, peoh!"

14- Me 'm-eus eun denig bihan droug  
Hag eun tortig war e chouk.  
Evitañ da veza tord,  
Bez en-eus madou a beb sort,  
Bez en-eus kanab ha lin,  
Hag ed da gas d'ar vilin;  
Bez en-eus lin ha kanab,  
Hag ed da gas d'ar marhad.

15- Marharidig a blij din,  
Kalz a labour a ra din:  
Goro ar zaoud, o has er-maez,  
Torri ar bodez, skuilla al laez!  
Mond d'ar helorn david kig  
Hag henn debri evel eur big;  
Mond d'al liorz david kaol,  
Hag o drailla war an daol.

16- Santig an truch (*an trucher*)  
Oa bed seiz vloaz en e gluch.  
Pa oa saved en e zav,  
E oa truch memestra !

17- C'hwez an te hag ar hafe  
A zo gand merhed Landerne;  
C'hwez an tiñ hag ar roz gwenn  
A zo gand merhed Lesneven;  
C'hwez ar bezin hag ar brug  
A zo gand merhed Terrug;  
C'hwez ar bezin hag ar mor  
A zo gand merhed an Arvor.

18- Me 'm-eus eur wezennig 'dreñv ma zi,  
Pevar aval ruz en enni:  
Unan din, unan d'am mestrez,  
Ha daou d'am hamaradez.

19- Karrig a dro  
A denn bro;  
Karrig a red  
Na bad ked.

C'HOARIOU BUGALE

4

20- Ar yarig (c'hoari mouchig-dall)

Doupa! doupa! gand ar gelienenn;

En he dorn ema ar spillenn;

Pe en dorn dehou, pe en dorn kleiz,

Ema skouarn ar bleiz.

21- Dañs-tro:

Troig mezo, bara laez,

'N hini gouezo 'h ay maez.

22- Troig mezo, bodig glaz,

'N hini zello dreist ar vaz,

'N hini zello dreist e skoaz,

A vo ruilled gand ar waz. (ar waz:al lapous)

23- An hini zello dreist e gein

A vo ruilled gand ar vein.

(A vo stlaped mein outañ).

24- Gutu, gutu, Mari Spillou,

E peseurt dorn ema da spillou ?

Pe en dorn kleiz, pe en dorn dehou ?

Pehini anezo ho-po ?

25- Eul loa, diou loa,

Karabin, karaba,

Impin bourdon,

Kadbarin, grifon,

Er-maez, kompagnon ! (Implijed e vez gand ar vugale evid gouzoud piou a vo "e-barz").

26- Hei 'ta, marhig,

Peleh ema da barkig?

Pe ema pell, pe ema tost,

Deus d'ar gêr a-raog an noz ! (Evid lakaad eur bugel da lampad war an daoulin.)

27- Skoit war an nor ! (Skei war an tal)

Sellit e-barz an ti ! (sevel an abrantou)

Savit ar hlanched ! (Sevel ar fri)

Deuit e-barz ! (lakaad ar biz er genou)

Sonit ar hloh ! (Sacha war ar skouarn).

Distagit mad: sellid e-barz (pe: sellit 'barz); savid ar;  
deuid e-barz (pe: deuit 'barz).

28- C'HOARI AR SKOUARN:

(En eur grogi e skouarn unan all, e houlenner digantañ:)

- Dir pe houarn ?

- Dir !

- Neuze e vo sached warni hir ! (Hag e sacher dezañ war e skouarn).

- Houarn!

- Neuze e vo sached dit war da skouarn ! (Hag e sacher warni adarre.)

Red e oa respont:

- Na dir na houarn,

gand ma vo lezed din ma skouarn !

20 bis - Evid c'hoari mouchig dall:

Ar yarig, ar yarig,

Peleh emañ he zi?

--'N eur gambrig, 'n eur gambrig;

Alhwezed eo warni.

--" Mez me a dro,

Hag a zistro,

Ken am-mo ka'd tri;

(ka'd: kaved)

Hemañ pe henhont deuy ganin!

EVID LAKAAD AR VUGALE DA LAMMAD WAR AR VARLENN

29- Hei do! marh'ig,  
Pell ema da barkig?  
- P'ema pell, p'ema tost,  
Me vo' r g'er a-raog an noz.  
(pe: Deus d'ar g'er a-raog an noz.)

30- Ehudo! da Gemper,  
War or marhig gwer;  
Ehudo da Bariz,  
War or marhig griz.  
Ehudo! Da Boullidahu  
Da gerhad paneradou avu.

31- Dia! jaoig, david gwin  
Dishouarn ha digabin, (digabestr)  
Dre an drein, dre ar vein,  
Peder dimezell war e gein;  
Peder all war e lost...  
Darn, paotr! darh! paotr!

32- Marh (ano ar bugel) a ya da Vrest,  
Dishouarn ha digabestr,  
Dreist an drein, ha dreist ar mein,  
Ha (ano ar bugel) war e gein.

33- Ema ma mammig boned ruz,  
Oh ober krampouez gand ludu,  
Ha ma zad e penn an daol  
O konta arhant d'e fillor,  
Hag an hini bihan e lost an ti  
O tañsa! gand lost ar hi.

34- Bu al lae! Bu al lae!  
Krog an tan e koad ar hae,  
Hag en ti hag er wern,  
Hag e koadig Milin ar Wern;  
Hag en ti hag en oaled,  
Hag en kraouig an deñved!

35- Hei do! marh (ano eur bugel)  
Da Landerne david boñboñ,  
Boñboñ, bara mad,  
D'ar paotrig-mañ ha d'e dad,  
Hag eun tammig war ar zamm,  
D'ar paotrig-mañ ha d'e vamm!

36- D'ar plahig-mañ ha d'he zad,  
Hag eun tammig war ar zamm,  
D'ar plahig-mañ ha d'he mamm!

37- Hei!hei! Trikotin!  
Da Lanuon da gerhad gwin,  
Da gerhad gwin ha bara gwenn,  
Dreist an drez ha dreist ar vein,  
Ha (ano eur bugel) war e gein!  
(Trikotin: ano eur gazeg.)

38- Eun den kreñv ----eun den kreved;  
 Eur baleer braz---eun den breved;  
 Eun neuier kaer---eun den beuzed;  
 Eun tenner mad---eun den lazed.

39- *Lavared a ra ar hloh:*  
 Bimbalañ,  
 Yannig zo klañv;  
 Ar vaz valeo,  
 Yannig bareo!

40- Glaw ha heol  
 Ema an diaoul e platein kaol.  
 Heol ha glaw  
 Ema an diaoul e platein faw.

41- Eur roue hag eur rouanez  
 O-daou o tenna panez.  
 Ar panez a oa kaer,  
 A oa aed gand al laer.  
 Hemañ 'n-oa eved gwin,  
 Ha neuze oa aed sod,  
 Ha goude-ze 'noa lammed  
 E-barz ar podad yod.

42- Marharid Milimaout  
 Deut dre amañ gand ho saoud:  
 Kig ha fars a zo er pod,  
 Deut dre amañ hag ho-po lod.

43- Perigou melen, kraoñnigou gell  
 he-deus ar vatez gand ar mevel;  
 Krapouez amanened, bannigou laez,  
 'n-eus ar mevel gand ar vatez.

44- Soubenn laeh  
 Boued an oheh; (*ohah*)  
 Soubenn kig  
 Boued ar pinvig.  
 Soubenn deur (*dour*)  
 Boued ar peur. (*paour*)

45- Hei da Gemper, hei d'ar Pont !  
 Da Bont 'n Abad ranker mond,  
 Da glask amann d'an Itron  
 Euz diwar ar maez,  
 Na gav ked mad soubenn al laez.

46- Yod mell  
 Debr pe sell.  
 Yod gwineh tu (*gwinez tu*)  
 Foet ag an neu du (*an daou du*).  
 Yod kerh,  
 Her foet ar-lerh.  
 Un dro d'ar liorh,  
 Hag a-benn d'an dorh (-bara).  
 (*Evid lavared eh eo ar yod-kerh eur boued skañv a dremen buan*).

47- Bing! bang! klohou!  
 Piu zo maro?  
 Jegou Begou!  
 Gand eur horvad gwadigennou.  
 Peleh vo douared?  
 En kornig ar vered,  
 Leh ma kah an evned. (*tu a veje da lared "kan"!*)

48- **AR GRAMPOUEZEREZ:**  
 Eun daou pe dri devez a zo  
 Emañ va zoaz krampouez e go,  
 Rag va heuneud zo er hoad,  
 Ha va bouhal a zo didroad,  
 Ha va amann zo er marhad,  
 Ha va bleud zo c'hoaz o valad,  
 Ha va spanell e Montroulez,  
 Ha va rozell e Karaez,  
 Ha va zrebez e Landreger,  
 E-barz ar hovel oh ober,  
 Ha va fillig zo e Perroz,  
 Allaz, setu deued an noz,  
 Allaz, setu deued an noz !

49- Marharidig Milimaout,  
 Deuit en hent-mañ gand ho saout;  
 Eun askornig a zo er pod,  
 Deuit en hent-mañ, ho-po lod;  
 Dacu avalig zo ennañ,  
 Deuit en hent-mañ, hag ho-po unan.

*Distagit mad: deuid en hent-mañ  
 gan o saout.*

50- Marharidig Billimaout,  
 Deus en hent-mañ gand da zaoud.  
 Tri avalig zo en tan,  
 Deus en hent-mañ, 'po unan. *Distaga: kik ha fars.*  
 Kig ha fars a zo er pod,  
 Deus en hent-mañ, 'po da lod.

51- Kwignaoua;  
 Sah bara,  
 Dour berved,  
 Mineved...  
 Kwign, kwign,  
 Ema da zah en pign!

52- Kwignaoua, kwign, Pipi,  
 N'am-eus bed mann diganti,  
 Nemed eur grampouezenn graz  
 Hanter zebred gand ar haz.

53- **PERAG EO DU DA HENOU ?**  
 - Lavar din, Rozig, perag eo du da henou?  
 - Gand ar mouar eo du.  
 - E peleh ema ar mouar?  
 - War an drez ema ar mouar.  
 - E peleh ema an drez?  
 - War ar hleuz ema an drez.  
 - E peleh ema ar hleuz?  
 - War ar menez ema ar hleuz.  
 - E peleh ema ar menez?  
 - Dindan an erh ema ar menez.  
 - E peleh ema an erh?  
 - Teuzed eo an erh gand an heol.  
 - E peleh ema an heol?  
 - E-barz ar mor da guzad;  
 Ma ne gredit ked, it da weled!

54- Dige, dige do,  
 Va milin a dro.  
 Dige, dige, da,  
 Va milin a ya.

55- Petra vo da zijuni?  
 - Soubenn an druzoni!  
 Petra vo da lein?  
 - Soubenn ar hig melen!  
 Petra vo da goan?  
 - Soubenn ar hig moan! (Kerlann).

56- Soubenn ar rouz,  
 D'ar paotrig louz.  
 Soubenn al laez,  
 D'ar paotrig kaez!

57- MA ZI BIHAN WAR AR MAEZ.  
 Me am-eus eun tiig war ar maez  
 Hag a zo toed gand krampouez;  
 E vogeriou zo graed gand yod,  
 Al leurzi gand laez ribot.

Pa baro an heol war an to,  
 Ma hrampouezenn a grazo.  
 Pa gouezo glao war ma zi,  
 Ez in war neuñv gand ar gwazi.

Kouezed ma moger en he foull,  
 Em zoenn ez eus eun toull.

Ma hazig a lip ar yod;  
 Ma hi du a dap e lod.  
 Me am-eus debred leur ma zi  
 Gand plijadur, 'n eur c'hoari.  
 Ha bremañ ne chom mui netra  
 Nemed yod da zifoltra.

*distaga: lib ar/ dab e*

58- Debrom hag evom,  
 Sachom ganeom;  
 Gream chervad,  
 Ha birviken ne vefom laeron.

Yehed d'an hini bihan, ma teuio braz !

59- Didedoup! Didedoup!  
 Da Vontroulez david stoup...  
 Dibedoñ! Dibedoñ!  
 Da Garaez david kraoñ.

60- Hei! hei! Dikodrin...  
 Da Landerne david gwin,  
 David gwin ha bara mad,  
 Da Yannig vihan da wellaad.

61- Ya! ya! ya! D'ar Pont,  
 Da Bont 'n Abad e ranker mond,  
 Da glask brignon d'an Itron.  
 He-deus droug en he halon.

62- Ya, da Gemper, ya, d'ar Pont,  
 Da Bont 'n Abad e ranker mond  
 David brignon hag halon (*holen*)  
 Da ober soubenn d'an Itron.

63- Ya, da Gemper, ya, d'ar Pont,  
 Da Boull-Dahud ranker mond,  
 Da glask bara d'an intron  
 He-deus droug en he halon.

64- Roeñv 'ta! roeñv 'ta!  
 Deom ahann da besketa,  
 Ma 'r-bo pesked bremaig (*bremaig*)  
 Da zebri gand ar bara;  
 Ha warhoaz, da zijuni,  
 Ni or-bo pesked, bridilli.  
 Aed ar bagou d'ar Vajin (*ar Vas yen*)  
 Nemed Tonton Yann ar Spin;  
 Deud ar bagou toud en aod,  
 N'eus bed nemed eur hellig! (*eur heveleg mor*)

65- Bicha bula, bicha bala,  
 Piou a yelo da ingala?  
 Marh ar Brunig a Lezunig  
 En-eus torred va hoz pillig.  
 Pillig vihan, pillig vraz,  
 Pillig ar vourhizien zo braz.  
 Ya! du, ya! gell,  
 Pe me dorro da askell,  
 Eskell gell an durzunell,  
 Kerz d'ar foenneg da youhel.

66- Bicha, bula, kigala,  
 Piou a yelo da gerhad  
 Ki ar Brunig ha Salaünig  
 A zo frited war ar billig?  
 Pillig vihan, pillig vraz,  
 Pillig an oll vourhizien zo braz.  
 Ya du! ya yell!  
 Pe me dorro da eskell,  
 Eskell yell an durzunell;  
 Kerz d'ar foenneg da youhel !

67- Bicha bula, kik ala,  
 Piou a yelo da gerhad  
 Ki ar Breunig a Saleunig  
 A zo frited war ar billig;  
 Pillig vihan, pillig vraz,  
 Pillig ar bourhiz a zo braz.  
 Cha! du, chal gell,  
 Pe me dorro da eskell,  
 Eskell briz-du ar sparfell;  
 Kerz d'ar foenneg mar geo red.  
 Chichon mignon; lagad dilagad,  
 Kerz d'ar gêr, pe te vezo taged.

68- Me im-eus eun ti war ar muez,  
 A zo foenned gand krampouez;  
 An euzerieu graed gand yod,  
 Al leuzi gand laez ribot;  
 D'an Ened e vez kig macout,  
 Kig ejen ha kig saoud.

69- Bransigellet, tourigellet (*troiellit*)  
 Kas't va mamm da bigelled,  
 Ha va zad, d'ar hoste an henchou,  
 Da zrailla mein gand e zentou; (*e zent*)  
 Va breur, d'ar menez glaz,  
 D'ober krampouez gand mein glaz,  
 Ha va c'hoar, d'ar menez gwenn,  
 Da ober krampouez gand dienn.

70- Ha va breur e penn an daol,  
 Da gont' arhant d'ar minor;  
 Ha va c'hoar er menez gwenn,  
 D'aoza krampouez dre 'r raden; (*dre: e-kreiz*)  
 Ha va c'hoar er menez du,  
 D'aoza krampouez gand ludu.

71- Tro, tro, meill Kerharo!  
 Meill Kerharo ya endro.  
 Ar goukou e kana dei,  
 Ar gerhei e vala hei,  
 Ar babouz e aoza youd,  
 Ha Gwillou Rouz a zebr toud!

72- Gwillou Rouz, mab ar bleiz  
 En-eus debred kant barr heiz,  
 Eur bodezad bara drailled,  
 Ha c'hoaz ne oa ked hanter-garged;  
 Hag eur billigad youd,  
 Ha c'hoaz e levere ne oa ked boud;  
 Hag eur billigad laez kaouleded,  
 Ha c'hoaz ne oa ked kreved;  
 Hag e levere e vamm:  
 --" Klañv ar Haper! ne zebr tamm!"

- 73- Piou a zeu? Ha me a ya  
 Da di an tortig da goania.  
 E ti an tortig ema ar cher  
 Euz tri haz bihan war ar ber;  
 Euz tri haz bihan ha diou vran  
 Zo e ti an Torig da goan.
- 74- Petra vo da zijuni?  
 Soubenn ar glujiri!  
 Petra vo da lein?  
 Soubenn ar hig brein!  
 Petra vo da goan?  
 Soubenn ar hig bran!
- 75- Petra vo da vern?  
 Ar vaz war ho kern!  
 Petra vo da lein?  
 Ar vaz war ho kein!  
 Petra vo da goan?  
 Yod poazed war an tan!
- 76- Soazig vihan zo fin ha braz  
 Yel' da Gallag gand he zad  
 Hi 'no per hag avalou,  
 Eur morzol bihan da zrailla kraoñ. (*kraou*)
- 77- Ma Doue  
 Me zo glahared  
 Aed eo ar haz  
 'Barz ar gabared (*doare armel*)  
 Hag eo deud er-maez  
 Leun e govad laez.

78- Eun allig, eun allig, eun allig  
Eun allig, eun allig c'hoaz.

17

Mard eo toull ho pasin wenn  
Eun allig, eun allig, eun allig  
' Skuillo laez war ho parlenn.

Mard eo toull ho pasin zu  
E skuillo 'l laez-se war ar ru.

Mard eo toull ho pasin vraz  
E skuillo 'l laez war an hent braz.  
(DASTUM, Nn 3, pajenn 17)

## GWISKAMANTOU

18

79- Deom, deom,  
Kas an douar ganeom,  
Leuskom Per er gêr  
Peogwir eo fall e votou ler.  
Leuskom Paolig war an hent,  
Da zrailla mein gand e zent.

80- Laver't-hu din-me, brocher laou,  
Dond davedon 'benn diriaou:  
Me 'm-eus tri hi ha tri haz,  
Hag o-c'hweh emaint en noaz;  
Dond da ober deze beb a chupenn,  
Da vond disul d'an overenn.

81- Kemenerien, paotred ar vaz,  
Deut davedom 'benn warhoaz:  
Me 'm-beus tri hi ha tri haz,  
Hag o-c'hweh 'maint e noaz;  
Me ray dezo beb a vragou  
Hag ivez chupennou.

82- Rollit, rollit, tu pe du,  
Botou ler, botou ru,  
Dirollit, dirollit,  
Margodig vihan.

83- Me oa bed e Kernolenn,  
Me 'm-oa kaved eur bistolenn,  
Med ma godell a oa toull,  
Kouezed ma fistolenn er poull!

84- Boudadoup! Boudadoup! Boudadoup!  
N'int ked mad, al loerou stoup;  
Al loerou stamm violed  
Zo mad d'ar paotrig da gaoued.

85- Deom, deom,  
 Kasom an douar ganeom.  
 Laoskom Perig er gêr,  
 Peogwir eo fall e votou ler;  
 Laoskom Yannig war an hent,  
 Da zrailla mein gand e zent!

86- Dip ha dip ha doup ha doup,  
 Ema ma haz o neza stoup,  
 Ha ma hi o tibuni,  
 Med ma gwiader a vank din.

87- Gwiaderig traoñ ar waz,  
 Deuit davedon warhoaz  
 D'ober dillad d'am haz,  
 Ha ma hi a chomo en noaz.

88- Daou droad bihan o vond d'ar hoad,  
 Eur votez nevez war beb troad;  
 Daou droad bihan o vond d'ar gêr,  
 Goude beza kolled eur votez kaer.

89- Dalhit ho potou fall  
 Ken n'ho-po eur re all.

90- Vi bihan war ar pont,  
 Da Bont 'n Abad e rankan mond  
 Da gerhad butun da va eontr,  
 Eur zae ruz, eur zae hlaz,  
 Va Yannig bihan zo en noaz.

91- Dañs, Yann, gand da zah lann!  
 Dañs, Per, gand da zah ler!  
 Dañs, Paol, gand da zah kaol!

92- Va breur Jakez, va breur Jakez,  
 Kousked out? kousked out?  
 Sonit 'ta, sonerien,  
 Dañsit, pillauerien!  
 Bimbalañ,  
 Bimbalañ! (Kerlann)

93- Ma breur Jakez,  
 Ma breur Jakez,  
 Kousked ous,  
 Kousked ous?  
 Deus da zebri krampouez (krampouz)  
 Gand laez dous.

94- Me 'm-eus amañ tud yaouank  
 Hag o-deus kalonou frank:  
 Aotrou, prestit din ho sal  
 Eun nebeudig da zañsal...  
 Me 'm-eus amañ tud yaouank  
 Hag o-deus kalonou frank.

95- Son, son soneréz,  
 Ma tañso ar billaueréz.  
 Ma ne zonez ked mad,  
 Me daolo ahanout dreist ar hoad  
 Da glask da vamm ha da dad.

- 96- Dilun, dimeurz ha dimerher,  
Ha diriaou ha digwener,  
Disadorn o vond da Gemper,  
Ha disul o tond d'ar gêr.

## KONTA

- 97- Deom atao,  
Pemp ha pevar a ra nao;  
Deom bepred,  
C'hweh ha pevar a ra deg.  
Nao  
Ra eur gont vrao;  
Deg,  
Kont ar wreg.

## BLOAVEZ MAD

- 98- Me zouet deoh eur bloavez mad,  
Yehed kreñv ha boued war ar plad.  
Kig bevin ha kig sall,  
Bara gwiniz war an doal.  
Kaol pomed en ho jardrin,  
E-barz al liorz pour hag irvin.  
Karotez braz ha panez krenn  
Evid ma vo mad ar zoubenn.
- 99- Yehed ha prosperite  
Keit ha lost eur gwesklêv.
- 100- Bloavez mad d'ho lod,  
Ha tiegez dilogod.

- 101- Koz ha yaouank, braz ha bihan,  
Bloavez mad deoh a reketan:  
Dillad didoull war ho tiouskoaz,  
Labour didorr, yod siled poaz,  
Kerh ha gwiniz leiz an irhier,  
Krapouez larded a gorfajou,  
Kig ha fars a grabanajou,  
Amann melen leiz ar ribot,  
Da gousked beb a wele blod,  
'Hed ar vuhez kalon.laouen,  
Ma vo eüruz ho planedenn!

## PESK EBREL

- 102- Kerz da gerhad gwinegr dous e ti an apotiker.
- 103- Kerz da gerhad din maen lemma reun.
- 104- Kerz da gerhad din-me deg gwennegad bara debred.
- 105- Kerz david deg gwennegad treid siliou sall.
- 106- Kerz david lostou gwizikleved.w (gweskleved)

## MEURLARJEZ

- 107- Meurlarjez! Meurlarjez!  
Me garfe 'padfe bemdez;  
An eost teir gwech ar bloaz,  
Gouel-Mikêl beb seiz vloaz.



115- *An alhweder:*

Sant Per, digor din,  
 Biken mui ne behin!  
 Digor 'ta, digor,  
 Digor da zor!  
 Kemer truez ouzin  
 Pe va gouzoug a dorrin.  
 Sell an douar pegen izel,  
 Ha me pegen uhell!  
 Bouzar out  
 Pe n'ez out?  
 Mouzad rez,  
 Hag e rez?  
 Mad, Per, gra da benn,  
 Me zo ' vond da ziskenn,  
 Hag adarre e pehin,  
 Hag e rin, rin, rin.

116- *An alhweder:*

Pignad a ran, pignad a ran,  
 Pignad a rankan...  
 Koueza a ran, koueza a ran;  
 Terri va goug a rin, mar kouezan...  
 Koueza a ran, koueza a ran,  
 E puñs an ivern e kouezan.

117- *An alhweder:*

Mond a ran en neñv, en neñv, en neñv;  
 Diaoul! diaoul! diaoul! koueza en ivern a ran.

118- *An alhweder:*

Krik, krik, ma labousig,  
 Ma 'm-befe sah, em-befe ed.

119- *Ar vohruz:*

Kig hag u,  
 'Me ar pollu. (*ar vohruz*)  
 U da Bask,  
 'Me an drask!

120- *Ar verienenn:*

Mamm al labour vraz,  
 A labour en hañv  
 Evid ar goañv.

121- *Ar verienenn:*

Mamm al labour vraz  
 A labour hirio evid warhoaz.

122- *Ar vuohig-Doue:*

Buoh-Doue, me ho ped,  
 Va zremenit dreist ar gloued;  
 Ma hasit d'ar baradoz,  
 Me ho supli deiz ha noz.

123- *Ar vuohig-Doue:*

C'hwilig Doue,  
 Diskouezit an hent dein  
 D'ar baradoez.  
 Bed on bed  
 Ha deid endro.  
 Ankouehed em-eus  
 An hent d'eno.

124- *Al laouenan war eur skourr:*

Na dorr ked, dorr ked, dorr ked!  
 Dir, dir, dir, pa ne dorr,  
 Dir, dir, dir, pa ne dorr.

125- *Al laouenan:*

Em bro-me, ez eus keuneud kordenn teo, teo, teo,ken  
 teo ha ma gar!

126- *Al laouenan, o tiskenn war eur ruskenn wanan:*

Pim! paon! fanterr...biah!... N'eus den?  
 Unig hag unig,  
 Divig ha divig,  
 Teirig ha teirig,  
 Mond a reont oll em hovig!

- 127- *Al laouenan: red eo lavared buan-ha-buan ar frazennou-mañ evid dreveza anezañ:*  
 Me am-oa kaved eur vuzugenn,  
 Ken teo 'vel ma morzed!  
 Ouiskanlar! Risked en-oa!  
 'H a war ar barr, hag e lar:  
 Dir pe houarn , pa ne dorr ked!
- 128- *Ar pintig: red eo lavared buan-ha-buan ar frazeun da heul evid dreveza mouez ar pintig:*  
 An hini a gas e vugale vihan d'ar skol, a vez desked dezo da skriva ha da lenn.
- 129- *Ar pintig, pa deu endro an nevez-amzer goude eur goañv kaled:*  
 Ebad dit-te, pa out chomed beol!
- 130- *Lavaroud a ra ar pintig d'ar re hanter-vezo:*  
 Piou, piou, piou,  
 Zo aed da Gemper hirio?
- 131- *Pa'z eus heol, e kan ar pintig:*  
 E peleh ema, e peleh ema,  
 An hini evel don a oar kana?
- 132- *Ar pichon hag e bichonez:*  
 Ar bichonez:--" Pokit din, ma dous!"  
 Ar pichon: --" Poked am-eus deh."  
 Ar bichonez:--" N'am-eus ked a zoñj."
- 133- *Kannerezig an dour:*  
 Tamm, tamm, pillou, tamm!
- 134- *An tad-moualh:*  
 Kia du, kia ruz,  
 Da charre koad d'ar menez du!
- 135- *Ar bistrag:*  
 C'hwí strep, c'hwí strep.

- 136- *Ar vran (o vond etrezeg he neiz):*  
 Me am-eus kaved eun touuuuuuuuseg!  
 Me am-eus kaved eun touuuuuuuuseg!  
 An tad-bran, e beg ar wezenn:  
 Lard eo? lard eo?  
 Soav toud, soav toud!  
 Laorañsig, ma mabig,  
 Deuit d'ar banked!
- 137- *Ar voualh:*  
 Kig ha bara loued,  
 Hennez eo va boued.
- 138- *An drask, pa'z eus arne, d'an ejenned:*  
 Dia! duig, dia! Ruzig,  
 Tenna 'r harrig  
 Deuz an toullig!
- 139- *Ar goukoug:*  
 Koukougoug,  
 Tokou plouz.  
 Koukoug, koukoug,  
 Koukoug, pennou touz,  
 Lakait ho tokou plouz.
- 140- *Pa'z erru ar heveleg, e houlenn digand ar goukoug a zo o vond kuit:*  
 Ar heveleg:--" Petra zo er vro?"  
 Ar goukoug:--" Laez kaouled ha laez tro."
- 141- *Ar goulmig:*  
 Ar goulmig wenn e vond endro...  
 An hini he savo a ray "chou!"  
 A-benn tri miz, kala-mae,  
 Me ray glahar da eur re,  
 Pa ve din-me va-unan e ve.  
 Rika, rika, rikara,  
 Divinit gand piou ema!

142- *Ar goulmig:*

Koulmig, koulmig wenn,  
Peleh e leverit-hu din-me diskenn?  
--" En eur gêrig a zo du-ze,  
War lein ar menez;  
E leh 'ma Per ha Paol  
Ha Mari-Madalen;  
Tri o skriva, tri o lenn,  
Ha tri o talhen eur houlaouenn. (*o terhel*)

D'EUR VELHWEDENN GROGENNEG.

143-

Blêj, blêj,  
Tennit ho korniou hir er-maez,  
Me roio deoh  
Eun tamm bara 'mann  
Eun tamm bara laez;  
Ha ma ne rit ked,  
'Po ar vaz 'vid mond da glask ho poued!

144-

Papa lêtj,  
Dibouch da gornigou er-maez,  
Ha me roy dit soubennig al laez.

145-

Blezou, Blezou, (*Bleaz*)  
Tenn da gorn e-mezou, (*er-maez*)  
Me roy dit eun tamm bara laezou. (*laez*)

EUR C'HWENENN

146- Me 'm-eus gweled ur c'hwenenn,  
Un troad dehi ar dour Kelwenn,  
Un arall ar dour Sant Nikodem,  
Hag e skope c'hoah e Baod e marhad an amonenn.

28

KILLOG HA YAR

29

147- Yarig du, yarig wenn,  
Dika daka logodenn.

148- *Killog Vann an Du:*  
Brava killog zo er vro-mañ  
E ti Yann an Du emañ.

E bluegou a zo ken dous  
Hag ar seiz pe ar voulouz.

E loerou a zo melen-hlaz,  
Hag e vragou a zo tafetaz.

Fached oll dud an ti,  
Dre ma teu abred d'o dihuni.

Ha dreist an oll Izabellig;  
Honnez henn karfe maro-mik.

--" O! tav sioul, emezi d'ar hillog;  
O! tav sioul, na vez ked ken sod!"

--" Mar deo me mestr ar higi-  
Me a gano d'an eur ma karin.

Me a gano da hanternoz,  
Heb mond na hirroh na berroh."

149- *Kan ar yar goude dozvi:*  
Me zo bemdez o tozvi,  
Ha n'ouzon ked peleh eh a;  
Ar wreg a dorr, an ozah a lip,  
Ha mad a-walh a ra!

150- Ar yar a goll he vi  
O kana re goude dozvi.

151- O! Ma Doue benniget!  
 Pebez torad laboused!  
 Naonteg vi am-oa lakeed,  
 Ugent labous am-eus kaved.

152- *Ar hillog a lavar:*  
 Kokogo kogog,  
 Lak va fri er pod!

153- *Ar hillog:*  
 Ar han a zo din eur marz  
 Pa vez an deiz en e darz!  
 Gand ar beure e sav skler,  
 Gwechou hir ha gwechou berr;  
 An oll her hlev er harter:  
 Ko, ko, ko, kog, kog, kog.

154- *Ar hihier:*  
 Mar dan dis...  
 ---" Fout kaer a ra ahanous."  
 ---" Me hacho kig hageskern  
 El an diaoul ag an ihuern."  
 ---" Fout, fout, fout."

155- *Ar hizier:*  
 --- Mar dan dit...  
 --- Fout kaer a ran ahanout.  
 --- Me a vreso dit kig hageskern,  
 Evel an diaoul euz an ivern.  
 --- Fout! fout! fout!

156- Bisig ma haz, e peleh oh bed?  
 E Lannig kerhor, da glask ma boued!  
 Piou oa er gêr?  
 An aotrou!  
 Ha petra 'n-eus roed deoh?  
 Mann ebed!  
 Ha petra 'n-eus lavared deoh?  
 Mond d'ar gêr da logota!

157- Bisig ma haz,  
 Ba peleh oh bed?  
 Ba ti mamm-goz.  
 Petra 'peus bed?  
 Krampouez frites ba'n amann!  
 'Peus ked digased unan din?  
 Nann!  
 Chatit, loen louz!

158- Bisig ma haz,  
 Peleh out bed?  
 --"O kerhad laez dous,  
 O kerhad laez trefñk;  
 Kouezed ar vaz war ma hein."

Me am-eus eur hazig rouz,  
 A zo tagnouz ha pikouz,  
 Me a raio deuz e benn  
 Eur podig d'ober soubenn.  
 Me a raio deuz e skouarn  
 Diou votezig d'al louarn.  
 Me raio deuz e zaoulagad  
 Eul lunedìou da ma zad.  
 Me a raio deuz e fri  
 Diou votezig da ma hi.  
 Me a raio deuz e deod  
 Eur falhig da droha geot.  
 Me a raio deuz e zentaou (e zent)  
 Eur rastell da zifraosta 'l laou.  
 Me raio deuz e grohenn  
 Diou linseñ hag eur pallenn.  
 Me raio deuz e gov  
 Eur baillig da voueta 'r moh.  
 Me raio deuz e bao kleiz  
 Eur maillig da frika 'n heiz.  
 Me raio deuz e bao dehou  
 Eur maillig da frita viou.  
 Me raio deuz e lost  
 Eur vazig da droi ar rost!

- 161- --"Bich, ma haz,  
 Mab da Gampion,  
 Eontr da Vilion,  
 Larit din ho son,  
 Peleh oh bed?"  
 --" En Kersaliou."  
 --" Oh ober petra oa an Aotrou?"  
 --" O frita viou."  
 --" Bed 'peus eun tamm?"  
 --" Ya, eul lomm."

- 162- Ar haz:  
 A re da re,  
 Ma zad a zo laer, ha me ivez.

- 163- Ar haz:

Me 'm-eus eur mignon e Pontreo.  
 Ma zad a oa rouzmouzer,  
 Ma mamm a oa rouzmouzerez,  
 Ha me a zo rouzmouzer.

- 164- Ma hi ha ma haz a oa dimezed deh;  
 Kalz a dud a feson a oa war al leh:  
 Sourig ha Mourig, Markiz an Tremeur,  
 Ha kalz a liboudenou a oa deued da heul.

- 165- Eno ema Loullig, or hi,  
 Daou vignon ahanom-ni!  
 Eñ a ya da gas an deñved  
 D'ar park gand an oñ loened;  
 Eñ harz ouz an hailloned:  
 Waou, waou, waou!

- 166- Unan, daou ha tri,  
 Stag mad ar hi,  
 Tonton Jan-Mari.

167- Homañ zo eur gazegig wenn,  
Eur friig arhant en he fenn.  
O rititi bidaig, trrou,  
O rititi tralala, prrou eñ eñ!  
Pa oan o paseal e Kerellenn,  
Chomed va bided er vouillenn.  
O rititi bidaig, trrou,  
O rititi tralala, prrou, eñ eñ!

168- Ar jao:  
An deval ar man goar,  
Ar manez el ma karan,  
Ar ar plén roulit,  
Er marchosi n'am ankouehit ked.

169- Hei do, marhig,  
Peleh ema da barkig?  
P'ema pell, p'ema tost,  
Me vo er gêr a-raog an noz.

170- Ar zaoud:  
Pa vez amzer gaer en hañv,  
D'ober eun dro bell eh an.  
Piou zo du-hont, a larit?  
Selaouit hag e klevot!  
Sed a ganont oll gevred:  
Meu, meu, meu!

171- An deñved:  
Or mereuri a Goad-Bleiz,  
Brava hini zo en Breiz!  
Eno ez eus eur bagad  
A ouspenn triweh dañvad;  
Selaouit-i o vegeliad:  
Bê! bê! bê!

*Distaga: selaouid-i.*

172- Deñved, deñved, deuit d'ho kraou!  
Perag? perag?  
Ema ar bleiz er hoajou.  
Ped aneze?  
Nao ha deg.

Piou eo an tad?  
Ar gontell vraz.  
Piou eo ar vamm?  
Ar gontell gamm.  
Diwallit, diwallit,

Deñved paour, ouz ar bleiz kounnared!

173- Deñvedigou, deut d'ho kraou!

Petra zo nevez en traou? (en traoñ)  
Ar bleizi er hoad.  
Ped?  
Nao pe zeg.  
Deut d'ar gêr, mar gellet!

174- Chataligou, deut d'ar gêr mar gellet.

Perag?  
Ar bleizi er hoad.  
Ped?  
Nao pe zeg.  
Hag ar vamm?  
Ar gontell gamm.  
An tad?  
An abad.  
Ar breur?  
An ebeul.  
Hag ar c'hoar?  
Aed gand al loar!

175- Ar bleiz:

Ar bleiz koz  
'Pad an noz  
A jilgamm  
E droad kamm.  
Al loar gann  
'Barz ar stank  
A c'hoari  
Patati!

176- Ar pemoh:

Me oa bed e foar ar Rohig,  
Me 'm-oa prened eur pemohig.  
Pa oan 'n em gaved er gêr  
'Klemme ar pemohig  
En e govig:  
Bidi, toh, toh, toh.

177- *Ar havr:*

Leh m'eo staged ar havr eo dao dezi chom;  
Mar he-deus boued e tebro,  
Ha ma n'he-deus ked, e vlejo.

178- *Logod:*

Fanch,  
Al logodenn en e vanch  
Ha ne ouie ked,  
E oa al logodenn en e veg.

179- *Al logodenn er bod.*

Ficha, ficha logodenn,  
Er bod, er bod,  
Ficha, ficha logodenn,  
Er vodenn!

War he hov ha war he hein,  
Er bod, er bod,  
War he hov ha war he hein,  
Er bod drein!

War he zreid ha war he fenn,  
Er bod, er bod,  
War he zreid ha war he fenn,  
Er vodenn!

Ober a ra kalz a dreñ, (*a drouz*)  
Er bod, er bod,  
Ober a ra kalz a dreñ,  
Er bod drein!

Taped e vo gand ar haz,  
Er bod, er bod,  
Taped e vo gand ar haz,  
Er bod glaz!

Gand ar haz e vo taped,  
Er bod, er bod,  
Gand ar haz e vo taped,  
Ma ne deh ked!  
(*Janedig Plasard- Soniou an Uhel*)

36

37

180- Al logodennig vihan,  
E peseurt toull emañ?  
En toull-mañ, pe en toull all?  
Aed e-biou gand eun all!

181- Youenn Poulloudenn,  
Tapit al logodenn,

Ha kasit 'nei kostez an daol,  
Da vahata 'nei gand eun dreujenn gaol,  
Ha kasit 'nei da benn ar bank,  
Da vahata 'nei gand eun dreujenn lann,  
Ha kasit 'nei kostez an ti,  
Ha plantit butun dei 'n he fri!  
(*distaga: tapid al logodenn*)

182- *Laou:*

Selaou, selaou!  
En tu all 'meur o laza laou.  
Selaou, selaou!  
En tu all 'meur o foeta toaz.

183- *Ar had:*

Hemañ eo ar prad  
A oa peured gand ar had.  
Hemañ redas,  
Hemañ dapas,  
Hemañ gignas,  
Hemañ zebras,  
Hag ar bizig bihan kamm  
N'en-oa bed tamm,  
A oa aed d'ar gêr,  
Da lared d'e vamm.  
(*Mond a reer euz eur biz d'egile*).

184- Eur hadig, diou hadig, teir gadig rouz,  
A oa en noz-mañ er bern plouz.  
Warhoaz da noz e vezint adarre,  
Ma hellan, me dapo aneze.

Eur hadig, diou hadig, teir gadig wenn,  
A oa en noz-mañ er bern foenn.  
Warhoaz da noz e vezint adarre,  
Ma hellan, me dapo aneze.

Eur hadig, diou hadig, teir gadig hriz,  
A oa en noz-mañ er bern piz.  
Warhoaz da noz e vezint adarre,  
Ma hellan, me dapo aneze.

Eur hadig, diou hadig, teir gadig velen,  
A oa en noz-mañ er bern brenn.  
Warhoaz da noz e vezint adarre,  
Ma hellan, me dapo aneze.

## NIVERADURIOU

- 185- *Yann hag e Aotrou.*
- Deiz mad, Aotrou!
  - Deiz mad, Yann! Petra zo a-nevez e Kernouenn?
  - Mann ebed, Aotrou, nemed eo maro or hi.
  - Maro or hi? Paour-kaez loen! Ha gand petra, Yann?
  - Goude beza debred re a gig buoh, Aotrou.
  - Kig buoh? Eur vuoh bennag a zo bed lahed e Kernouenn?
  - N'eus ked. Ho saoud eo a zo maro.
  - Maro, ma zaoud! Gand petra 'ta, ma Doue?
  - Foeltred int bed o charread dour.
  - Ha perag charread kemend a zour?
  - 'Vid laha an tan, Aotrou.
  - Komz 'ta, na peseurt tan?
  - An tan a zo kroged en ho lojeiz, Aotrou.
  - Bed eo an tan war ma lojeiz?
  - Ya, Aotrou, rosted int toud.
  - Evel ma lavaran deoh, Aotrou.
  - A-hend-all, mann a nevez.

186- Da biou out mab?  
 - Da biou out mab?  
 - Da Yann Galvez.  
 - Peseurt Kalvez?  
 - Kalvez ar Menez.  
 - Peseurt Menez?  
 - Menez ar Fouillou.  
 - Peseurt Fouillou?  
 - Fouillou stoup.  
 - Peseurt stoup?  
 - Stoup goulou.  
 - Peseurt goulou?  
 - Goulou koar.  
 - Peseurt koar?  
 - Koar melen.  
 - Peseurt melen?  
 - Melen vi.  
 - Peseurt vi?  
 - Vi yar.  
 - Peseurt yar?  
 - Eur yar wenn,  
 Eun tok war he fenn!

187- Al logodennig vihan,  
 E peseurt toull emañ?  
 En toull-mañ, pe en toull all?  
 Aed gand ar haz!  
 Peleh emañ ar haz?  
 E penn ar bern kolo.  
 Peleh emañ ar holo?  
 Deved gand an tan.  
 Peleh emañ an tan?  
 Beuzed gand an dour.  
 Peleh emañ an dour?  
 Eved gand an ejenned.  
 Peleh emañ an ejenned?  
 Aed da goad ar Roh  
 Da ober fih ha foh.  
 (fiha: c'hoarzin dre zindan)

188- Ped eur eo?  
 Ped eur eo?  
 Nav eur hanter.  
 Piou 'n-eus lared?  
 Al logodenn.  
 Peleh ema?  
 Er chapel wenn.  
 Oh ober petra?  
 Ober goulou.  
 Peseurt goulou?  
 Goulou koar.  
 Peseurt koar?  
 Koar melen.  
 Peseurt melen?  
 Melen vi.  
 Peseurt vi?  
 Vi yar.  
 Peseurt yar?  
 Yar wenn.  
 Peseurt gwenn?  
 Gwenn-sin.

Peseurt sin?  
 Sin fall.  
 Peseurt fall?  
 Fall-du.  
 Peseurt du?  
 Du-pod.  
 Peseurt pod?  
 Pod pri.  
 Peseurt pri?  
 Pri prad.  
 Peseurt prad?  
 Prad lenn.  
 Peseurt lenn?  
 Lenn Geravel,  
 stanked he zoull  
 en daou benn.

189- Peleh eo aed ma zamm bara-kig-me ahann?  
 Gand ar chas.  
 Peleh eo aed ar chas?  
 Dindan ar gwele.  
 Peleh ema ar gwele?  
 D'an tan da zevi.  
 Peleh eo aed an tan?  
 D'ar mor da veuzi.  
 Peleh eo aed ar mor?  
 Eved gand an ejenned.  
 Peleh eo aed an ejenned?  
 Drailled gand ar bouhili.  
 Peleh eo aed ar bouhili?  
 D'ar hovel da lemma.  
 Peleh eo aed ar marechalig koz ahann?  
 Da glask eur vaz kloued  
 Da ganna Yannig hag e wreg...  
 Dao dik ha dao, dao! dao! dao!

190- Peleh eo aed da dad?

Da Landreger.  
D'ober petra?  
Da gousked mezer.  
Petore mezer?  
Mezer toupin.  
Petore toupin?  
Toupin mad.  
Petore mad?  
Mad tan.  
Petore tan?  
Tan goulou.

(kousked: lakaad war ar prad)

191- Da biou out-te mab?

Da Yann Galvez.  
Peseurt Kalvez?  
Kalvez ar menez.  
Peseurt menez?  
Menez Are.  
Peseurt Are?  
Are Fouillez.  
Peseurt Fouillez?  
Fouillez ar stoup.  
Peseurt stoup?  
Stoup goulou.  
Peseurt goulou?  
Goulou koar.

192- Per ha Paol oa ' pika kaol.

Kaol oa ker,  
Aed gand al laer.  
Laer oa fin,  
'N-oa eved gwïn.  
Gwïn oa tomm,  
'N-oa laosked eur bromm.  
Bromm oa kaled,  
Oa kouezed war an oaled.

(bromm: bramm)

Petore goulou? 42

Goulou koar.  
Petore koar?  
Koar melen.  
Petore melen?  
Melen vi.  
Petore vi?  
Vi yar.  
Petore yar?  
Yar wenn.  
Eun tamm kig-sall etre da zent,  
Etre ma re, bara gwenn.

(toupin: stoup).

Peseurt koar?

Koar melen.  
Peseurt melen?  
Melen vi.  
Peseurt vi?  
Vi yar.  
Peseurt yar?  
Yar wenn,  
Plant da fri en he zalbenn!

'N oaled oa mein,  
Ha kouezed war walenn e gein.  
E walenn-gein oa kig,  
Hag aed gand ar big.  
'R big oa du,  
Ha deved eun u.  
'N u oa mad  
Ha lakeed war grampouezenn  
he zad.

193-

AR PARK KAER

43

Me am-eus eur park,  
Pebez park kaer!  
Endro d'ar park 'z eus eur hleuz.  
Pebez kleuz kaer!

Ar hleuz zo endro d'ar park, hag ar park a zo din.

War ma hleuz zo kouezed eur vèzenn,  
Dicuz begig eur goulmig wenn.  
Pebez mèzenn gaer!

Ar vèzenn zo war ar hleuz, ar hleuz zo endro d'ar park,  
hag ar park a zo din.

Diwar ar vèzenn zo saved eun dervenn.  
Pebez dervenn gaer!

An dervenn zo diwar ar vèzenn, ar vèzenn zo war ar hleuz,  
ar hleuz zo endro d'ar park, hag ar park a zo din.

War an dervenn zo eur brank,  
Pebez brank kaer!

Ar brank zo war an dervenn, an dervenn zo diwar ar vèzenn,  
ar vèzenn zo war ar hleuz, ar hleuz a zo endro d'ar park,  
hag ar park a zo din.

War ar brank zo eun neiz.  
Pebez neiz kaer!

An neiz zo war ar brank, ar brank zo war an dervenn, an  
dervenn zo diwar ar vèzenn, ar vèzenn zo war ar hleuz,  
ar hleuz zo endro d'ar park, hag ar park a zo din.

War an neiz zo eun ui.  
Pebez ui kaer!

An ui zo war an neiz, an neiz zo war ar brank, ar brank  
zo war an dervenn, an dervenn zo diwar ar vèzenn, ar vè-  
zenn zo war ar hleuz, ar hleuz zo endro d'ar park,  
hag ar park a zo din.

War an ui zo eun evnig.  
Pebez evnig kaer!

An evnig zo war an ui, an ui zo war an neiz, an neiz zo war  
ar brank, ar brank zo war an dervenn, an dervenn zo diwar  
ar vèzenn, ar vèzenn zo war ar hleuz, ar hleuz zo endro  
d'ar park, hag ar park a zo din.

War an evnig zo eur bluenn.  
Pebez pluenn gaer!

44

Ar bluenn zo war an evnig, an evnig zo war an ui,  
an ui zo war an neiz, an neiz zo war ar brank, ar  
brank zo war an dervenn, an dervenn zo diwar ar  
vêzenn, ar vêzenn zo war ar hleuz, ar hleuz zo en-  
dro d'ar park, hag ar park a zo din.

Ar bluenn zo war an evnig, an evnig zo war an ui, an  
ui zo war an neiz, an neiz zo war ar brank, ar brank  
zo war an dervenn, an dervenn zo diwar ar vêzenn, ar  
vêzenn zo war ar hleuz, ar hleuz zo endro d'ar park,  
hag ar park a zo din.

Hag oll ez int din!

*Diwar Visant KOAD (Soniou an Uhel).*

194- AR HOG YAOUANK HAG AR BOLEZ

Eur wech e oa eur hog yaouank hag eur bolez, hag a oa fiched  
koant, o vond d'eun devez-pardon. Pa oant erru e-kichenn eur poull,  
o-doa gweled eno eur wezenn-avalou, hag eun aval ruz e-barz.

--" Hi! eme ar Bolez, kerz david din an aval ruz!"

--" N'an ked, eme ar Hog, rag va zroadig koant a gouezfe er  
poull, hag a vefe mastared."

--" Ne ray ked! ne ray ked! kerz david din an aval ruz!"

Hag ar Hog da vond er wezenn, ha da hija.

--" Kouezed eo an aval?"

--" N'eo ked c'hoaz."

Hag eñ da hija adarre, hag an aval ruz da goueza. Med pa oa  
an aval ruz o koueza, oa ivez troadig koant ar Hog o koueza er  
poull.

--" Lared mad am-oa dit, Polez! Kerz bremañ da glask Kaol,  
da dorcha din va zroadig koant, mastared er poull."

--" Kaol, deus da dorcha troadig koant ar Hog, a zo kouezed  
er poull."

--" N'an ked, eme Gaol."

--" Ma! me a ya da glask Gavr d'az tebri."

--" Ma! Kerz eta."

--" Gavr! deus da zebri Kaol. Kaol ne deu ked da dorcha  
troadig koant ar Hog a zo kouezed er poull."

--" N'an ked, eme ar Havr."

--" Ma! Me a ya da glask Bleiz d'az tebri."

--" Ma! Kerz eta."

--" Bleiz, deus da zebri Gavr. Gavr ne deu ked da zebri Kaol.  
Kaol ne deu ked da dorcha troadig koant ar Hog a zo kouezed er  
poull."

--" N'an ked, eme Vleiz."

--" Ma! Me a ya da glask Fuzul d'az laza."

--" Ma! Kerz eta."

--" Fuzul, deus da laza Bleiz. Bleiz ne deu ked da zebri Gavr,  
Gavr ne deu ked da zebri Kaol. Kaol ne deu ked da dorcha troadig  
koant ar Hog a zo kouezed er poull."

--" N'an ked, eme ar Fuzul."

--" Ma! Me ya da glask Tan d'az poaza."

--" Ma! Kerz eta."

--" Tan, deus da boaza Fuzul. Fuzul ne deu ked da laza Bleiz,  
Bleiz ne deu ked da zebri Gavr, Gavr ne deu ked da zebri Kaol, Kaol  
ne deu ked da dorcha troadig koant ar Hog a zo kouezed er poull."

--" N'an ked, eme Dan."

--" Ma! Me ya da glask Dour d'az laza."

--" Ma! Kerz eta."

--" Dour, deus da laza Tan. Tan ne deu ked da boaza Fuzul, Fuzul  
ne deu ked da laza Bleiz, Bleiz ne deu ked da zebri Gavr, Gavr ne  
deu ked da zebri Kaol, Kaol ne deu ked da dorcha troadig koant ar  
Hog a zo kouezed er poull."

--" N'an ked, eme Zour."

--" Ma! Me a ya da glask Ejenn d'az eva."

--" Ma! Kerz eta."

--" Ejenn, deus da eva Dour. Dour ne deu ked da laza Tan, Tan  
ne deu ked da boaza Fuzul, Fuzul ne deu ked da laza Bleiz, Bleiz  
ne deu ked da zebri Gavr, Gavr ne deu ked da zebri Kaol, Kaol ne  
deu ked da dorcha troadig koant ar Hog a zo kouezed er poull."

--" N'an ked, eme Ejenn."

--" Ma! Me a ya da glask Lerenn d'az staga."

--" Ma! Kerz eta."

--" Lerenn, deus da staga Ejenn. Ejenn ne deu ked da eva Dour,  
Dour ne deu ked da laza Tan, Tan ne deu ked da boaza Fuzul, Fuzul  
ne deu ked da laza Bleiz, Bleiz ne deu ked da zebri Gavr, Gavr ne  
deu ked da zebri Kaol, Kaol ne deu ked da dorcha troadig koant ar  
Hog a zo kouezed er poull."

--" N'an ked, eme Lerenn."  
 --" Ma! Me ya da glask Lard d'az larda."  
 --" Ma! Kerz eta!"

--" Lard, deus da larda Lerenn. Lerenn ne deu ked da staga Ejenn, Ejenn ne deu ked da eva Dour, Dour ne deu ked da laza Tan, Tan ne deu ked da boaza Fuzul, Fuzul ne deu ked da laza Bleiz, Bleiz ne deu ked da zebri Gavr, Gavr ne deu ked da zebri Kaol, Kaol ne deu ked da dorcha troadig koant ar Hog a zo kouezed er poull."

--" N'an ked, eme Lard."  
 --" Ma! Me ya da glask Logodenn d'az tebri."  
 --" Ma! Kerz eta!"

--" Logodenn, deus da zebri Lard. Lard ne deu ked da larda Lerenn, Lerenn ne deu ked da staga Ejenn, Ejenn ne deu ked da eva Dour, Dour ne deu ked da laza Tan, Tan ne deu ked da boaza Fuzul, Fuzul ne deu ked da laza Bleiz, Bleiz ne deu ked da zebri Gavr, Gavr ne deu ked da zebri Kaol, Kaol ne deu ked da dorcha troadig koant ar Hog a zo kouezed er poull."

--" N'an ked, eme Logodenn."  
 --" Ma! Me a ya da glask Kaz d'az tebri."  
 --" Ma! Kerz eta!"

--" Kaz, deus da zebri Logodenn. Logodenn ne deu ked da zebri Lard, Lard ne deu ked da larda Lerenn, Lerenn ne deu ked da staga Ejenn, Ejenn ne deu ked da eva Dour, Dour ne deu ked da laza Tan, Tan ne deu ked da boaza Fuzul, Fuzul ne deu ked da laza Bleiz, Bleiz ne deu ked da zebri Gavr. Gavr ne deu ked da zebri Kaol, Kaol ne deu ked da dorcha troadig koant ar Hog a oa kouezed er poull."

--" Ma! Me a ya, eme ar Haz."

Ha Kaz da vond da Logodenn,  
 Logodenn da Lard,  
 Lard da Lerenn,  
 Lerenn da Ejenn,  
 Ejenn da Zour,  
 Dour da Dan,  
 Tan da Fuzul,  
 Fuzul da Vleiz,  
 Bleiz da Gavr,  
 Gavr da Gao!,  
 Ha Kaol da dorcha troadig koant ar Hog  
 A oa kouezed er poull. *Job ar RAHER (Soniou an uhel)*

195- Biskoaz ne c'hoarzis kemend-all,  
 Evel am-oa graed en deiz all!  
 O weled ar bleiz o prena per  
 Hag al louarn o werza yer.

Me 'm-eus gweled eun ouner vloaz,  
 A zouge Kemper war he skoaz,  
 Brest ha Rekourans war he lost,  
 Ha c'hoaz ez ae ganto d'ar post.

Me 'm-eus gweled eun ouner vriz,  
 O kas ar bed-mañ war e giz.  
 Me 'm-eus gweled eun ouner zall,  
 O kas ar bed-mañ d'ar bed all.

Ha me 'm-eus gweled eur goukoug,  
 Eun daboulin stag ouz he chouk;  
 Me 'm-eus gweled eur heveleg,  
 O planta fao en eur garreg.

196- Dip ha dip ha doup ha doup,  
 'Mañ ma haz o neza stoup  
 Ha ma marh o neza gloan  
 D'ober loerou d'ar bihan.

Ha ma yar o neza sei,  
 Ha ma hog o kana dei,  
 Ha ma hi war lein an ti,  
 'H anza boued d'an houidi.

An houidi, dorn ouz dorn,  
 O kas an toaz d'an ti-forn,  
 Hag al louarn e toull an ti,  
 'H ober al lez d'ar gwazi.

Hag ar vuoh war greiz an hent,  
 'Krial forz gand an droug-dent,  
 Ma zad-koz e-tal an tan,  
 O hou! petra vo da goan.

Yod gwiz-du  
 Ha bahadou en daou du,  
 Yod minuz-kerh  
 Ha bahadou war e lerb.  
*(yod minuz-kerh:yod kerh)*

197- Me 'm-*oa* gweled pevar forhell  
O tañsal en eur skudell:  
Ar re-ze zañse manifik,  
Med ar plas a *oa* bihannig.

An deiz all, o tremen eur gêr,  
Me welas eno eun dra gaer:  
Gweled ar fubu o torna,  
Hag ar helien o tiblouza.

Eur haz oh ober tro al leur,  
Peder logodenn ouz e heul;  
Peder logodenn hag eur raz,  
Souden o-dije buhez ar haz.

Hag eul logodenn hag eur raz,  
O tougen teil war eur hravaz;  
Ma lare al logodenn d'ar haz:  
Karga dezi e tougje c'hoaz!

Me 'm-*eus* gweled peder logodenn,  
Peb a dok houarn war o fenn,  
Peb a gleze euz o hoste,  
Hag i o voned d'an arme.

Me a welas goude eur had,  
Hag en he zreid eur botou-koad,  
Ha war he lerh al levrini;  
Dant ked evid tapoud anezi.

Me 'm-*eus* gweled en Pontreo,  
Kigna kezeg hag i beo,  
Hag o hrohenn 'barz ar marhad,  
O horv er park o labourad!

Me 'm-*eus* gweled eur gazeg wenn,  
En eul ianneg 'kriba he fenn,  
Ganti eur morzol da laha laou,  
Kredit, me ne laran ked ger gaou.  
*Barba Tassel (Soniou an Uhel).*

48

198- H on d'vond da lared deoh eur ganaouenn,  
An hini 'mañ ked gwall hir;  
Me ray ma goug da droho  
Ma 'z eus 'barz eur poz gwir.

Disul vintin, p'oen saved  
Oa 'r hioh 'son ar gousperou;  
Me lampas 'barz eur berenn,  
Da hijal avalou.

Kaer 'm-*oa* hijal ha hijal,  
Ne goueze mann med mouilhi.  
Errued paotr ar berenn:  
Petra rit da ma brini?

Eñ dapas eur maen 'n e zorn,  
Ha fœltras 'nañ ouz ma zal;  
'Benn pa oen bizited mad,  
Oan bloñsed en kov ma gar.  
*Kaned gand Herri ha Gwilcher. Embanned war bladenn "Fiseled  
Grouvez".*

199- Ma n'am-*eus* biskoaz lared gaou,  
Mez bremazon me laro daou:  
Me *oa* bed an deiz all en Goudelin,  
Hag e welis an naer o tenna lin.

Hag al logodenn hag ar haz  
O tougen lin war ar hravaz;  
Ha c'hoaz lare 'l logodenn d'ar haz  
Lakaad warni, e tougje c'hoaz.

Neuze welis eur heveleg  
Gantañ eur horn butun 'n e veg,  
Hag eur gontell gantañ 'n dorn,  
O trailla butun da lakaad 'n e gorn.

Neuze welis al louarn,  
Gantañ 'n e benn eur brid-houarn,  
O tremen dre eur bagad polizi  
Heb na redas war-lerh hini.

49

Ha neuze welis ar bleiz,  
Gwisked en voulouz hag en seiz,  
O lampad dreist da hloued al lanneg,  
'N e henou eur marh hag eur gazeg.

Neuze welis eul logodenn dall,  
'Tougen ar bed-mañ hag ar bed all,  
Ha c'hoaz e lere al logodenn gæz,  
N'doa ked treo 'walh deuz he beh. (treo: trao)

Neuze welis eul laouenan,  
A lar an dud n'eo ked bihan,  
O skrapad gand e ivinou,  
'H esa taol Treger en Gwelou.

Neuze welis war douar Runan,  
An tad-moualh 'kluchañ war ar vran,  
Ha lost ar big war an drezenn,  
Setu echu ma hanaouenn.

200- Biskoaz n'am-oa kement c'hoarzed  
Evel digwener tremened,  
'Weled ar helien o torna  
Hag ar c'hwibu o tibella!  
Ar haz oh ober tro al leur,  
Peder logodenn ouz e heul.  
Me 'm-eus gweled eur heveleg  
O planta pour en eur garreg;  
Me 'm-eus gweled eur peziad gad  
O pourmen gand eur botou-koad,  
Eur perukenner war he zro  
O lamad dezí he baro.  
E-mesk an traez hag a' bili,  
O teski neuñv d'an houidi,  
Em-eus gweled eun ouenner vloaz  
A zouge Kemper war he skoaz,  
Ha Landivizio war he lost,  
Ha c'hoaz ez ae ganto d'ar post;  
Eur gazeg koz o laza laou,  
Ha toud an dra-ze n'eo ked gaou!

201- Brenniliz !  
An tour e-kreiz an iliz;  
An iliz e-kreiz ar vered;  
Mar ne gredez ked,  
Kae da weled!

202- Biskoaz kemend-all  
'Vel 'm-eus gweled e Lokenvel en deiz all:  
Me 'm-eus gweled  
Eur hi du o planta kaol,  
Eul louarn oh arad,  
Eur yar o pigellad.

203- Biskoaz kemend-all  
'Vel e foar Vrasparz en deiz all:  
Eno oa lern o werza yer,  
Ha houidi o prena per;  
Bez e oa ivez eun ouenner zall,  
O tougen ar bed-mañ hag ar bed all,  
Ha c'hoaz e lare: " tehl! tehl! tehl!  
Ne oa ked ganti hanter veh!"

204- Pater noster dibidou,  
Ema ma haz o neza stoup;  
Ha ma marh o neza gloan  
D'ober loerou d'ar bihan;  
Ha ma yar o neza sei,  
Ha ma hog o kana dei,  
Ha ma hi war lein an ti,  
Oh aoza boued d'an houidi;  
An houidi dorn-ouez-dorn  
O kas an toaz d'an ti-forn;  
Hag al louarn war lein an ti,  
Oh ober al lez d'ar gwazi;  
Hag ar vuoh war an hent  
O krial forz gand an droug-dent;  
Hag ar mab e penn an ti,  
O c'hoari gand lost ar hi.

205- Biskoaz n'em-boa gweled kemend-all,  
'Vel em-boa gweled e Brasparz, en deiz all:  
Gweled ar bleiz o prena per  
Hag al louarn o werza yer.

52

DIVINADENNOU

53

206- Piou a ya da vale gand e di war e gein?  
(Kaved e vo ar responchou pajenn )

207- Petra a dremen a-dreuz an drez heb droug ebed?

208- Glaz evel prad,  
Gwenn evel erh,  
Barveg evel bouh?

209- Gwenn e-giz laez,  
Glaz e-giz kaol,  
Don e-giz ar puñs?

210- Eur bragou glaz,  
Eur chupenn wenn  
War he fenn?

211- Peseurt pesk n'en-eus tamm draen ebed ennañ?

212- Lavarit din eta, me ho ped,  
Piou a zeu hag a ya heb ober trouz bemdez?

213- Petra a daol e zillad pa deu ar goañv,  
Hag o gwisk gand mall pa deu an hañv?

214- Nijal a ran brao ha kempenn,  
Evel eur valafennig wenn;  
Ouz an douar a-dal ma stokan,  
A-daol-trumm ragtal e varvan ?

215- Ped lost leue a ranker kaoud evid paka an neñv?

216- Ruz e grohenn, ha gwenn e benn?

217- Anaoud a ran eur gazeg glaz-wenn,  
Hag a vez noz-deiz o tougen  
Traou skañv ha traou pounner,  
Dre n'eus forz peseurt amzer?

- 218- E-kichenn du-mañ ez eus eur maner,  
A zo diwalled mad diouz al laer,  
Ha n'eo ked gand eur hi eo c'hoaz,  
Me a lavar deoh goude warhoaz ?
- 219- N'on ked roue, hag e tougan kurunenn,  
N'on ked marheg ha koulskoude em-eus kentrou,  
N'on ked skrivagner hag e tougan eur bluenn,  
N'on ked keginer hag e roan da zebri?
- 220- Glebia a ra,                      Renta a ra,  
Maga a ra,                          Dond a ra,  
Laza a ra,                          Mond a ra ?  
Kemer a ra,
- 221- Divun piou a ya gand an hent,  
N'en-eus na daoulagad na dent,  
Hag a lavar dre ma'z a:  
Serr da gillog ha da yar,  
Ha lez da gi da harzal ?
- 222- Ha pa'z a d'ar foar,  
E tro e gov d'ar gêr;  
Ha pa'z a d'ar gêr,  
E tro e gov d'ar foar ?
- 223- Ruz dindan du,  
A laka gwenn da vreskenn ?
- 224- Petra a ya hag a zeu, ha da leh ebed ne da ?
- 225- Petra a zo gwenn evel erh, hag erh nend eo,  
Glaz evel kaol, ha kaol nend eo,  
Ruz evel tan, ha tan nend eo,  
Du evel glaou, ha glaou nend eo ?
- 226- Me am-eus eur gambrig wenn,  
A zo alhwezed en daou benn,  
Ha n'eus forz petra a rin,  
Ne din ked er-maez heb he zorri?

- 227- Me am-eus eur moutig brao,  
Na gar nag an noz nag ar glao,  
Kement a sked a zo dezañ,  
Ma n'hellan ked selloud outañ ?
- 228- O tremen du-mañ en deiz all,  
Em-oa gweled eur strollad fall,  
Peorien vud ha dall,  
O vond hag o tond, hag o tebri,  
Ha c'hoaz e oa eur zamm war gein pep hini ?
- 229- Eun ozahig toull-mouzer,  
Rouz ha moal ha miliner,  
E wreg a zo toull-mouzeréz,  
Rouz ha moal ha milinerez,  
E vugale toull-mouzerien,  
Rouz ha moal ha milinerien?
- 230- A-dreist ma zi unan a daolan,  
Da glask pa'z an, tri a gavan ?
- 231- Me am-eus eur marichal mad,  
Hag a labour deiz ha noz;  
Hennez eo ma mevel mad,  
Pa vanko e kouezin er foz ?
- 232- Me am-eus eur wezennig frank  
Hag a zo enni mil brank,  
Hag eun nezig e peb brank,  
Hag eun evnig e peb neiz,  
Ha pa ganont e kanont oll en eur vouez ?
- 233- Petra a dreuz an dour  
Heb beza glebied,  
Hag an drein,  
Heb beza piked,  
Hag a ya war daol ar roue,  
Heb beza taped ?

- 234- Ront on,  
Hir on,  
Gwenn on,  
Du on,  
Leun a doullou,  
Hag an oll a lamm warnon?
- 235- Perag e tro ar hi teir gwech a-raog kousked?
- 236- Petra n'eo bed biskoaz ha ne vo biken?
- 237- Me am-eus eur hi  
E penn ma zi;  
Ne zant ha ne harz,  
Med krafignad a ra evel eun targaz?
- 238- Daou dad ha daou vab a zo aed da leina en eun ostaleri; roed ez eus bed peder houlmenn dezo d'o fred. Debred o-deus unan pep hini, hag e chom unan c'hoaz?
- 239- Petra a ziskouez e zent da gement den a deu en ti?
- 240- Divunit piou a ya buan,  
Heb fiñval e zivesker,  
War eun hent ha n'eo ked meined?
- 241- Saved euz an douar ez a d'an douar?
- 242- Chouit hag e chouo,  
C'hoarzit hag e c'hoarzo,  
Leñvit hag e leñvo ?
- 243- Ruig ha duig  
A oar lakaad ar gwennig  
Da zañsal?
- 244- Fich-fich dre an ti,  
Heb daoulagad na fri ?

- 245- En deiz all e oan e ti ma faeron,  
Hag em-oa gweled daou er prizon  
lakaed heb an disterra torfed,  
na gand archer, na gand den ?
- 246- Atao e vez kleved,  
Morse ne vez gweled,  
Buan e treuz an aer,  
Buannoh an dour skler ?
- 247- Pevar emaint o redeg an eil war-lerh egile:  
An eil a zebr ar henta,  
An trede a zebr an eil,  
Hag ar pevare a zebr anezo oll ?
- 248- Redeg a ra em raog ha me war e lerh,  
Ha pa vez war ma lerh e redan en e raog;  
Mar da d'an tu dehou, ez an war an hini kleiz,  
Ha mar da war an tu kleiz, ez an war an tu dehou;  
En em dapoud n'hellom ked,  
Nag achap kennebeud,  
Ha neoah, daoust ha ma vefem o klask,  
En em zispartia n'hellom ked c'hoaz ?
- 249- Me a red ha gar n'am-eus ked,  
Me a gomz ha teod n'am-eus ked,  
Me a glev ha skouarn n'am-eus ked,  
Ha gand aer e vezan gwalhed ?
- 250- En eur voned ha doned,  
E tremenan ma amzer,  
Hag ar pezh a zo ar souezusa,  
Diblasa ne ran ked ?
- 251- Duig a lavar da ruig:  
Mar ma zoullez, me az lazo mik ?
- 252- Astenned on;  
Ha pa zavfen, netra ne vefe ken braz ha me;  
Ha m'am-befe daouarn, me a bakfe al laer;  
Ha pa gomzfen e tizolofen kalz a draou kuzed?

253- Nao barr en eur bod,

58

Nao mamm-golvan war beb barr,

Nao boñsin gand peb unan,

Hag eur hreunenn mell'e beg peb poñsin.

Grit ar gont, ha c'hwil a lavaro din

Ped greunenn mell a zo ?

254- Ano a zo bed euz unan hag a zo bed gweled o pignad gand tour  
Lanvelleg, heb sikour dorn na troad. An neb en-eus c'hoant a  
weled, her havo, hirio an deiz, war beg an tour, lojed brao  
en e di ?

255- Petra a ya da Bariz heb kerzoud ?

Responchou d'an divinadennou

206: ar velhwedenn. 207: an avel. 208: ar pour. 209: ar mor.  
210: ar bourenn. 211: pesk Ebrel. 212: an heol. 213: ar gwez.  
214: ar valzenn-erh. 215: unan, ma'z eo hir a-walh. 216: ar  
penn-ognon. 217: ar mor. 218: eur gestenn gand gwenan. 219:  
ar hillog. 220: ar mor. 221: ar vuzugenn. 222: kov-gar eun  
den. 223: an tan dindan eur podad laez. 224: ar momeder. 225:  
eur vouarenn. 226: eur vi. 227: an heol. 228: melhwed krogenneg.  
229: Eun neiziad logod. 230: eur vi. 231: ar galon. 232: eur  
ruskennad gwenan. 233: ar bann-heol. 234: ar bara. 235: dre ma  
ne gav penn ebed d'e wele. 236: eun neiz logod e skouarn eur  
haz. 237: eun drezenn. 238: ne oa nemed tri o leina; an tad-  
koz, an tad hag ar mab. 239: an drezenn. 240: al labous. 241:  
ar goumoulenn. 242: an hekleo. 243: ar podad laez war an tan.  
244: eur skubellenn. 245: ar melen hag ar gwenn er vi. 246: an  
avel. 247: eur had, eul louarn, eur hi hag eur bleiz. 248: an  
den hag e skeud. 249: an hekleo. 250: ar momeder. 251: ar billig  
war an tan. 252: an hent. 253: hini ebed: a-raog m'ho-po echu, e  
vo lonked ar greun. 254: Penn da benn gand an tour beteg ar beg,  
En deiz all,  
Ti hag all,  
Ez eo pigned ar velhwedenn grogenneg,  
Heb sikour dorn na troad,  
Evel m'her hreder ervad.

255: an hent.

Unan ouspenn: Bizig bihannig,  
Bizig ar bizou,  
Bizig mignonig,  
Liperig ar podou,  
Morzol al laou, al laou, al laou !

TAOLENN

Evid ober eul le.....niv.	1 da 5
Evid dispartia.....	6
Mab-den.....	7 da 19
C'hoariou bugale.....	20 da 28
Evid lakaad ar vugale da lammad war	
ar varlenn.....	29 da 37
Ar yehed.....	38 - 39
Ar boued.....	40 da 78
Gwiskamantou.....	79 da 90
Dañsou.....	91 da 95
Deizioù ar sizun.....	96
Konta.....	97
Bloavez mad.....	98 da 101
Pesk ebrel.....	102 da 106
Meurlarjez.....	107
Laboused, c'hwiled, amprevaned.....	108 da 142
D'eur velhwedenn grogenneg.....	143 da 145
Eur c'hwenenn.....	146
Killog ha yar.....	147 da 153
Kaz ha ki.....	154 da 166
Loened all.....	167 da 184
Niveradurioù.....	185 da 194
Ar park kaer.....	193
Ar hog yaouank hag ar bolez.....	194
Ar gevier.....	195 da 205
Divinadennou.....	206 da 255

## B R U D

Darbet eo bet da VRUD mervel, gand ar hresk a zo bet war ar moulla. Deut om a-benn da gaoud 4000 lur (5000 lur a dleom) digand or houmananterien. Mez reou zo n'o-deus ket respontet d'or helhlizer evid c'hoaz. Ra raint ar buanna ar gwella, mar plij.

Niverenn 51 BRUD a deüo er-maez dizale. Kavet e vo enni::

-- An ozah hag an daou gole, eur gontadenn gand Jakez Riou;  
-- Luskou, eur barzoneg gand Iwan an Diberder;

Kentskrid gand P.M. Mevel;

In Memoriam, ged Sten Kidna.

-- Tan chiminal, gand Ernest ar Barzig.

-- Kuzul Iliz Gwiglan, gand Paotr-ar-groaz-ruz.

-- Skol-dan e Kanol-leh ar Rospeg, e-kichenn Beg Dant Vaze,  
gand Visant an Askol.

hag eveljust Keleier EMGLEO BREIZ.

Roet e vo ivez da houzoud penaoz ema kont gand or hontchou.

Moulet e vo eur roll euz an oll bennadou a vez kavet e-barz BRUD abaoe an niverenn genta.

Diwezatoñ, e vo moulet eur haier barzonegou gand DANIEL TRELLU,  
bet unan euz pennou-braz ar Rezistañs e Breiz. Moulet vo ivez e eñvorennou.

Emaom e soñj advoulla an oll "BISKOAZ KEMEND-ALL".

KAVIT KOUMANTERIEN NEVEZ !

PAEIT HO KOUMANANT :

30 lur evid 4 niverenn,  
da gas da:

P.M. MEVEL, 14 Impasse BREIZ IZEL  
(arabad trei e galleg!)

29200 BREST.

K.R.P. 1499-55 Roazon.

(pe dre chekennou bank).

The first part of the report deals with the general situation in the country. It is noted that the economy is showing signs of recovery, but that there are still many difficulties. The second part of the report deals with the financial situation. It is noted that the government has taken steps to reduce the deficit, but that there is still a need for further action. The third part of the report deals with the social situation. It is noted that there are still many social problems, but that there are some signs of improvement. The fourth part of the report deals with the foreign situation. It is noted that the country is still facing some international difficulties, but that there are some signs of improvement.

THE ECONOMIC SITUATION

THE FINANCIAL SITUATION

The economic situation is showing signs of recovery, but there are still many difficulties. The financial situation is improving, but there is still a need for further action. The social situation is still facing many problems, but there are some signs of improvement. The foreign situation is still facing some international difficulties, but there are some signs of improvement.

